

RANCONTR A JOA ETRE DAOU DEN YAOUANC EN NAONET

HA SEPAR A C'HLAC'HAR EN KER LAVALETTE.

Var un ton nevez.

BRETONET a vas Vreiz-Izel, grit un arret d'am c'hlevet,
Ma teclarin dec'h eur guntel so en ho mesq composet,
Eus a gomzou eur fumelen ha va re da enebi,
Comparachabl eus eur fleuren a so anvet romani.

En eur vaper o voyagi, me am boa hi rancontret
Ha dre vril e gala tiri e oan anter souprenet,
E velet eur music flamancq a zirai a zone,
Hac ar verdaily yaouanc var bond al lest a zance.

Dre ar stum vad a exile eb appel e c'houlennis
Pe seurt alianq a c'heuille ha petra e benefic,
Ha ma oa prest din respontet : eur yates a gonfianq,
Er vro-ze neve arriet evit servich an noblanq.

Dre he demarch en polites, gand un doucder qer charmant,
Da suiva he c'hompagnones em boa eur desir ardent :
Mæs va desoign en comparis d'e guenet pa gomprenen,
Nemet eur skeut a yaouankis ne oa quen en e c'hichen.

E qer an Naonet e gouelis goude-ze e sortial,
Pa oa finisset an offic, eus an ilis cathedral :
Va dorn er pincin a laquis, da guemer dour benniguet,
Hac ebete e avancis, ma devoa ma saludet.

En gallec, neuse gand doujanq dei ma a lavaras :
C'hui rapport dre humilianq e vec'h traou Breiz-Yzelas ;
Car reglennou ar fierte so er vro-mañ conduet,
Mæs reglen an humilite a so neubout implijet.

Ma respont, en distrei en dro, brillant, douc ha quer tener :
Ya, me sorti eus va bro, divar rout ker Landreguer,
Hac er pez am laqua jenet e ma meus ampechamant
Ar principou a so fixet dre ar vro-mañ da barlant.

Em brezonec neuse soudan e teuis da anonci,
Me reget dre antretien, plac'h yaouanc, o condui :
Ma sortit a rout Landreguer merq o tenaridigues,
Me a zorti a rout Finister, a draouyen ker Montroules.

Den yaouanc, emei, certain, en desir ho fantazi
Heñlomp renet an estranjurien gant furnes ha modesti,
Ma c'hallin en eur gonsolin en assamblach hor c'homzou,
A chasael an angodi a ra va jenamanchou.

Fumelen, me zo ep cessi evel hirvoud eur sermon,
Dæbu va speret et voelc'hi plac' ar gonsolacion ;
Mæs neubet e vin consolet, car dont a ran da gredi
C'hui vo bourreo d'am joausdet, goude va accompagni.

Den yaouanc, va exempl vigner mar be ferm ho zantimant,
A vo eur breuven a sclerder eus hon amitie fervant
Da bini e vezin fidel bete an de eus va fin,
Hama reqqan en dilezel, a vo poesant va chagrin.

Nese da assina un de eus on amzer da zonet,
Marefomp dre sincrite merq un union barfet,
Deip da choas ar guir garante en jardin ar fleurdilis,
Evi gouvern on amitie ar rest eus hor yaouanquis.

Yaemei er garcen eus ar fleurdilis caera
Deip da choas peb a gurunen, a vesq ar re brillanta,
Pe a blassimp en armel a drezor ar yaouanquis,
Hadre on union fidel, ni on dougo d'an ilis.

Di vœu ar signal a squedid e mallezour ar furnes
He an deziq a anonci, m'ar be solid, ma mestres,
Gode an devez assinet, a dra facil e credan
Neseparo mui hor speret hed hon deyou er bed-man.

He eneal, va servijer, reglen hor promesseou,
M'ar bec'h evelon e formder, ne deo qet a arretou,
Mæs grad intancion erfad en de-se a breparet.
N'avec'h un enemi ingrat dar merqou a brometet.

Socroas gant ma bolante! Mæs finissomp da barlant,
He arretomp var qement-ze, car fin an de gommant.
Meu a lavaran eta, en esper d'en em velet
A de-se e c'haparissa er plac' hon eus assinet.

Mæs de an assinacion, ar goas a oa bet manqet
He ar plac'h a impinion neuse arrias doctet,
De ma crede facilamant e oa dei godisser
Er fragilou e santimant e deoa coutet re scler.

U de goude, var o daoulin e oaint en em remerqet
Ecuent Santes-Catherin, dirag auter an Drindet,
Elec'h mo deoa soutenit ar bounera tomderen,
Inomorenabl da bep speret a dud ar bed da gompren.

A den yaouanc, pa remerqas victim e zociete,
Vr e vemoar e tisqueñnas flaminen an amitie :

Mæs ebete en em avanq o oa geinet en guirion ;
Men a denyo da reparin va oll fantou passeet.

Ar c'hurunennou fleurdilis, emei ma servijer,
Eus an armel hor yaouanquis a zo collet or sclerder ;
Mæs mar cavit ar sclerder-ze en deoa d'o assambl,
Nin o fleurisso a neve ha doubla o yeoni.

Hor c'hurunennou, va mestres, ne allan qet da gavet,
Car ne varchem qet assambles er poent ma oaint dianquet.
Ha mar bec'h din godisseres, me vo hirvoudus retet :
C'hui e oa o gouverneres ha dec'h e oaint adresset.

Dec'h diveza, va servijer, e oa bet din lavaret
Evit passeat an amzer e teuit d'am darempret :
Dre ze, pa e d'am bolante heuil urzou ar virione,
Ne avancit mui va bete, evit heuil faus amitie.

Va mestres, james ne gredit e ve en guirion plasset
An dragidien ipocrit a gomis an teod milliguet :
Mæs heuilomp ar bromesseou a gonduemp qen leal,
Ha lezit oll droug oberou ar goal deodon infernal.

Retardit o steudi monden, ma sclerien va speret,
Car e lec'h ma coe ar voen e ve ive divranqet,
Ha gant un ach a draizon c'hui deu da zigrienni
Ar bed ros a opinion pini oa eus hon hench.

Mari-François, a dra onirion, ha c'hui a alfe credi
E teufen da c'heuil traizon a bemp leo d'ho frecanti?
Reqetti ran punition a beurs Doue, gent justiq,
Ma condufen un urs poeltron eneb or gouir yaouanquis.

Ya, den yaouanc, eb difer, red e vijec'h eur poeltron :
Heuil a rec'h poent eur godisser, de hon assinacion,
Car ma vije bet fermamant ho prepojou angaget,
James ide ho santimant c'hui n'ho pije trahisset.

Gant eun nom bras a dourmanchou en hon assinacion,
Ma ne barrissen a gomzou e parissen a galon,
Eur precursor, c'hui al credi, so cozi evel eun trejou,
Pini, qement a ya en ty e man indan ho boutou.

Ya, eus ar brecursoret e ser dor al liberte :
Credi a ran ar barfet a avancit va bete,
Dre ze eta renouvelomp on reglennou commancet,
Ha goude e c'hanavefomb hac int a vo faus verqet.

Mar Jeomp da renouveli or joausdet a neve
Antreid en eur ofrebiri, do c'hoas merq on amitie,
Pini, mar bec'h cri a garo d'en traissa dre gomzou,
Eus o torn men a recco da hognardi va joayou.

Mar recevit da respondanq eus vest en olifant guen
A douguenni va alianq composet en aour meleu,
Merq hon amitie men choaso gant eun nombr bras eus a joa,
Hac a zoufre quen ar maro evit dont d'en traissa.

An daou den yaouanc-man a gred, dre eur sort sincrite,
E arfermet, assur, er bed, ar rancontr eus o ide :
Mæs be o deus da souteni pouer an teir fleuren mechant
Pere a so anvet sourci, ha melconi, a tourmant.

Va mestres d'in so amaret eur bec'h pounner ha forbau,
Ar murmur e ma partifet vit ar guer a Orlean.
Penos resista d'an anquen, en de-se a angoni,
E tout da freza ar chaden a zo eus hor c'hondui.

Allas! emei, va c'hras mechant e deus bepret va c'heuillet :
Bremen, pa oan jooussamant queit eus va bro ecartet.
Goilded e teufe e rigueur d'am plassi en eur feson,
Ha da ma plonji er malheur bete griou va c'halon.

Salut ha c'hlac'har, va mestres, en porchet Sant-Semilien :
Ari an urz hac ar finves pini a rai va troublien :
Car ne vo qet cos on doare c'hui vo chanchet ho comzou,
Hac o po collet an alc'hoec e drezor hor memoariou.

Salocroas ne golin biqen merq hon amitie dener,
Avanqomp bete ar blienen ma passeemp hon amzer
Da arouzi gant on daolou ar boqeden fleur bian
Eus a jardin o prepojou, en ambazen Kerzerdan.

Er plac' man eta, va mestres, finissomp hon oll gomzou,
Car ne varchfomp mui assambl es ed ar rest on devezou :
Dre ze quiniadomp a galon, ya, evit birvigen,
Adieu er bredication dirac ar mestr souveren.

Va servijer, qen discleria ha donet da gontempli
Litanion Santes-Anna ha re ar Verc'hes Vari
Adieu a galon anterret qen a vo apparissa
Da c'hortos ma vezimp barnet en izelen Josepha.

Neuse er mes int sortiet a jardin o amitie,
Abars er guer a Lavalette, var bord ar c'ha nal neve :
Ene e cessi ar c'hiniat hac en ferm anretien,
En daelou eus o daoulagad a boullade en ho c'hiben.

Va mestres, bremar men droyo, ya, vel un den mantret,
Eb arreta bete va bro, da obteni joanilet :
Pro'ernet a rin en Montroulez, gant eur marq a volesti,
Dirag retablen ar Verc'hez en ilis Sant-Malari.

Hac en leal, va serviger, er memes intancion,
E carea e ve amzer ma ven ari em c'hanton.
Pa avanci c'hoas, gand adres, va moues a humilite,
Dirag imach Santes-Agnes, an ilis Berleouene.

Tud yaouanc, ne assambliet qet qen ferm ha ni o chaden :
Eur guir amitie separet a eo mortel da zouten :
Car evit ne ve qet scrifet var ar bisaich, dre gomzou,
Ar galon a ve glac'haret ha beued en daelou.

Ar zoon-man, en guirione, fi'naq a voa un de copiet
Gant un amenuzer yaouanc, ebars en qer a Naonet :
Anvet e *Olier MERGER*, dre scritur en peb sin,
Hac ar plac'h yaouanc a anver *Mari-Francoas VOLANTIN*.

Andaou den yaouanc-man, pa cesse ar c'hiniad eus ho c'hoizou,
A esper c'hoas en eur respont a speret dre lizerou ;
Ha ma na ellont assambli var ar bed-man ho bue.
O deus sonch d'en em saludi en gloar an eternite. AMEN.

PEDEN AR MOUSIK BIAN

D'AR WERC'HEZ

War don : *Potred Plouilliau. Kan 73.*

Ma mammik gez ha ma ferson
A lavare d'in bembe
Ho pidi a greiz ma c'halon
Ha da noz ha da veure.
Ma chelaouet, Gwerc'hez santel,
Evit mamm ho kemerann :
Dur zellik hep ken, ia, eur zell
War ar paour mousik bian !

An evnedigou pa greskont
A ia er mez euz ho nez ;
Da gentan gand aon e nijont ;
Ho mamm zo war ho evez.
Pell man ma mamm, Gwerc'hez zantel.
Evit mamm ho kemerann :
Eur zellik hep ken, ia, eur zell
War ar paour mousik bian !

Pa meuz bet laret kenavo
D'am mamm gez war he gwele :
« Pegoulz, em-hei, evi distro ? »
Ha ma mamm baour a wele.
Dinec'het-hi, Gwerc'hez zantel,
He foan eo ma foan vrassan :
Eur zellik hep ken, ia, eur zell
War mamm ar mousik bian !

Ma c'hoarik vad, ma c'hoar Anna,
A iel d'an iliz bemde
D'ho pidi c'hoaz, itron Varia,
Vit ma zad, vidon ive.
Chelaouet-hi, Gwerc'hez santel,
Eun ine diouz ar gwellan :
Eur zellik hep ken, ia, eur zell
War c'hoar ar mousik bian !

Pa iemp da laret hon peden
Hon daouigou d'ho chapel,
Ma c'hoar lare : « Sell eun dolen
» War-n-hi ar Werc'hez santel
» Hag a c'hoarz ouzimp gant true ! »
(A oamp eun oad teneran.)
» — Ma sellet ha ma breur ive,
» Ar paour kez mousik bian ! »

Enn ho tolen, o Gwerc'hez kaër,
A weler ho mab Jezuz
War ho tivrec'h, bugel dister,
Ken mad, ken karantezuz.
Ho Mab dinac'h netra ne hall
D'ac'h, Mamm ar c'hallondekan,
Gallout a c'hellet ta diwall
Ar c'hez paour mousik bian !

Ma mamm a lare d'in liez
Eo mestr a bep tra Doue ;
Mes Jezuz zo mab ar Gwerc'hez :
Petra n'hell mamm eur roue ?
Ma diwallet, Gwerc'hez santel,
Evit mamm ho kemerann :
Eur zellik hep ken, ia, eur zell
War ar paour mousik bian !

CANAQUEN NEVE

Gret en honor da beder dimezelle yaouanc.

Ma mije speret Apollon
Ou l'esprit d'un Voltaire,
Me mije composet eur son ;
Mais, hélas ! comment faire ?
Couscoude me a so pedet
Par quatre demoiselles
Da ober deze peb a couplet ;
Mais, hélas ! comment faire ?

E han da gommans da guentan,
Avec peu d'éloquence,
Dre unan anezo so clan ;
Mais, malgré ses souffrances,
Atao e deus eun air contant.
C'est ma Virginie ;
E daoulagat a so brillant,
C'est ma petite chérie.

Mamzel Lorenç so eur rosen,
Une fleur chérie.
Hi a deus eun daoulagat,
Ils sont dignes d'envie ;
Eur speret dous, eur galon vad,
Une tête capricieuse.
Me a vel voar he daoulagat
Qu'elle est très-amoureuse.

Elouison a deus eur brestans,
Un air très-agréable ;
Comparaget e ous Ortans,
Des fleurs la plus aimable,
Espicial pa ve guisquet,
Coiffée en artisane,
E eur blijadur e goelet ;
On la prend pour Diane.

Hoas a meus eun al da ober,
Et pour une jolie blonde,
A deus eun daoulagat seder
Et une bouche ronde.
Me gret e he eur min arc'hant,
Quand on s'approche d'elle.
Me a lavaro franchamant,
C'est la charmante Adèle.

Me gret var an dimezelet
Avoir rempli ma tâche,
En cas a ma venn bet manquet
Qu'aucune d'elles ne se fâche.
Prest on da gemer ma fluen
Pour corriger l'ouvrage,
Pe d'en adober pen a ben.
Que puis-je davantage ?

An hini neveys gret ar son
N'a point de rhétorique ;
Aliès e rim ep raison,
Il brave la critique.
Mes ma nije bet studiet
Un peu dans les sciences,
Marteze nije composet
Avec bien plus d'aisance.